



N. 150 meurzh 2015 - 5 €

NIVERENN an deiz-ha-bloaz!




Louarnia

Fin ha Foll!

150

C'hoarioù
Naggeneen
titeuf
MEURIAO
PAOTR LOUARN...


... HAG
EVEL-JUST
SANDRINE!



L. LeFevre

P.8-9 HA 14-15

1 atersadenn
+ 1 skritell !



P.11 REKIPE GWASTELL DEIZ-HA-BLOAZ LOUARNIG !

P.12 Naggeneen

P.10 MEURIAD

P.13 Titeuf er skol-erc'h

Atav en em gav ar sekredoù brasañ
e lec'hioù dic'hortoz.

Roald Dahl



Un tamm
preder...



Sandrine,
ha gwir eo e c'hell
an naeron-piton
debrñ al leoned ?

Youen, morse n'em eus klevet komz deus ul leon debret gant un naer-piton.
Un antilop avat, ya. Ha n'eo ket fall dija ! Kompren a ran da c'houlenn avat,
ha dedennus eo.

Bez e c'hellomp en em c'houlenn penaos e c'hell un
naer debrin ul loen kalz brasoc'h egetañ, hep di-
droc'hañ anezhañ en a-raok evel ma ra al leoned pe
ar bleizi. Ret eo d'an naer digeriñ bras e veg ! A-dru-
garez d'e javedoù ha d'e groc'hen e c'hell
astenn hag astenn c'hoazh e veg.
Digredus eo !

Mougañ a ra an naer al loen en e veg da
gentañ a-raok kas anezhañ pelloc'h en
diabarzh en ul lonkañ tamm-ha-tamm. Ur
wech lonket al loen da vat e c'hell an naer
chom hep debrñ sizhunvezhioù-pad.



Te ivez, kas da dresadenn
ha da c'houlenn da :
camille.kvb@orange.fr
pe dre lizher da :
Louarnig, Keit Vimp bev,
22 grand rue,
29520 Laz


Goulenn ha tresadenn gant Youen



150 miz eo *Louarnig* !

PETRA NEVEZ ?


CHEÑCHET HE DEUS DREMM LOUARNIG MEUR A WECH E-KORF 13 BLOAZ ! HA DALC'HEC'HET 'TEUS SONJ ?




A




B



C



D



E



F

KENSTRIVADEG

RENK AL LOUARNIGOÙ-MAÑ DEUS AN HINI GOSTAÑ D'AN HINI NEVESTAÑ.

1:

2:

3:

4:

5:

6:

DA ANV-BIHAN _____

DA ANV-FAMILH : _____

DA CHOMLEC'H : _____

Profoù a bep seurt a yelo ganit !

YEAH!

KRISMENN




Kas an tamm paper-mañ da : Louarnig, 22 Grand'Rue, 29520 LAZ pe kas da respontoù dre bostel da camille.kvb@orange.fr





SPITTED. "TUFET".
UR C'HOARI-GER GANT GIZ AR
PAJENNOÙ SPOTTED, E LEC'H MA VEZ
KASET KEMENADENNOÙ KARANTEZ.
E PEP LISE
E VEZ DEUS SE...


AR WECH-
MAÑ EO
"SPITTED",
AVAT.




PETRA
'SONJEZ
DEUS-SE,
PAOL?



NETRA.
AR C'HONTROL
VEFE BET
SOUZEHUS.




MA!
N'EUS KET MIL
DOARE DA
C'HOUZOUT!



...
"PAJENN
DILAMET!"



DIOUZH GWELET
EO BET DIVERKET
AR ROUPOÙ
DIWEZHAN
E KOULZ,
NEKETA?



MA.
NIZAR, RET EO
DIN...
NANN!



N'ON
KET...
NA SKARZHIT
KET 'NAJ.



AA?!
HA
PERAK
TA?
EZHOMM 'MO
GOUZOUT
MUIOCH,
ENTA!

DA VEZAÑ KENDALC'HET...

LIAMMAÑ GÊRIOÙ DAOU-HA-DAOU

DIWALL, TOULLOÙ-TRAP A ZO !


- | | |
|-----------|----------|
| Ti • | • Bleiz |
| Fest • | • Du |
| Ed • | • Droad |
| Tad • | • Dorn |
| Eil • | • Kêr |
| Mell • | • Mor |
| Kreiz • | • Kozh |
| Poull • | • Dery |
| Jug • | • Lizher |
| Gwezenn • | • Noz |
| Boued • | • Yar |
| Kig • | • Gar |
| Den • | • Avaloù |
| Golo • | • Neuiad |

C'HOARI

SELL PIZH !

PET KARREZENN A ZO EN HOLL ?

(BEZ E C'HELL LOD EN EM VESKA GANT LOD ALL.)



LUZIADENN...



Deiz-ha-bloaz Louarnig eo ! Da bep hini da zibab ur c'hwezigell... Sikour Kelig, Layla, Youenn ha Mona da zibab o hini.

O lenn gant aked ar frazennoù-se, kav gant piv a ielo pep c'hwezigell :

- Ne blij ket al liy melen da Layla, da Youenn e plij ayat.
- Glas eo c'hwezigell Kelig.
- Ne blij ar ruz na da yMona, na da Youenn.

Kas an enklask war-raok o leuniañ an daolenn-mañ betek penn !

	Ruz	Glas	Melen	Gwer
Layla			X	
Kelig	X	✓	X	X
Youenn				
Mona				

Diskoulmoù

Luziadenn : An hini ruz a ya gant Layla, an hini glas gant Kelig, an hini melen gant Youenn, an hini gwer gant Mona.
Sell pizh : Daou-ugent karrezenn a zo !
Liammañ : Ti-gar, Fest-noz, Ed-du, Tad-kozh, Eil-dorn, mell-droad, Kreiz-kêr, poull-neuiad, Jug-avaloù, gwezenn-der, boued-mor, Kig-yar, den-bleiz, golo-lizher.



RHAPS




BEZ DINEC'H, SETO

OLDYA



AN DIEUB STYLE !

DAGDA HOLLC'HALLOUDUS,
UN DEN-BLEIZ ZO OC'H
ARGADIÑ AC'HANOMP
HA N'EMAN KET KLEZE
AENGUS GANTAÑ !



C'HA C'HA !
GWIR EO NE BLIJ
KET D'AL LOENED
VIL-SE AN DOUR,
UN TAOL KAER
'NI EO AENGUS !

AENGUS ?



AARHA!

GRRR!

GNNN!

M'EO BET DANTET
GANT EGILE E TEUIO
DA VEZAÑ UL LOEN
GOUEZ D'E DRO... !
MONT A RA MAT
GANIT... ?



GRAT!
GRAT!

GRAT!
GRAT!
GRAT!

MONT A RA MAT,
MET LAOSKET
EN DEUS AR
SAC'H-LAOU-SE E
VIGNONED DIN !

Rekipe ar gwastell «re vat»



gant Kelig ha Shaani

Deiz
ha bloaz
laouen dit,
Louarnig!



Aozennoù :

- 3 vi
- 200 gr sukr
- 3 sac'hig sukr vanilha
- 9 loaiad vihan a laezh
- 9 loaiad vihan a eoul
- pe 140 gramm amann
- 200 gr bleud
- 1 sac'hadig goell
- Toaz-kraoñ
- Smartiz !



Meskañ ar vioù, ar sukr hag ar sukr vanilha gant ur fouet-tredan betek ma teufe an toaz da vezañ spoueek. Ouzhpennañ al laezh hag an eoul pe an amann, ha fouetañ c'hoazh. Ouzhpennañ ar bleud war-lerc'h hag ar goell, ha derc'hel da fouetañ.



Skuilhañ an toaz en ur voull-gwestell, lakaat er forn da boazhañ 45 munutenn-pad war 180°.



Ur wech poazhet, lakaat anezhañ da gouezhañ en tu-kontrol war un asied. Gallout a rez goloñ anezhañ gant toaz-kraoñ ha smartiz... na lipouz !





O TOSTAAT E DA
AR GOAÑ, HAG AR
CHASEOURIEN IVEZ.

DAOU BPUCKWOODJENI DEUS
MEURIAD AR YEUN BRAS A DA
DELET DA GAS KELOÙ BETEK
KÉRIADENN AR PENN-BRAS
WICAYAPAZIPA-PASU.

DIWALLERIEN AN NATUR EO AR BPUCKWOODJENIED.
PA VEZ-HI EN ARVAR, E TIFENNONT ANEZHI, HEP FEULSTER AVAT.



NE OUIE KET NAGGENEEN E DA
O TESKIÑ TRAOÙ HAG A VEFE
TALVODUS DEZHAN
EN AMZER DA ZONT.



UN NEBEUD DEIZIOÙ WAR-LERC'H E VOE UN EMGAV MEUR GANT PENNOÙ-BRAS
MEURIADOÙ PUCKWOODJENIED, E GWEZENN AR FURNEZ.



E-PAD PELL O DEUS KOMZET
A-RAOK DIVIZOUT MONT DA
VREZELIÑ A-BENN TRI LOARIAD.



DA VEZAÑ KENDALC'HET...

titeuf

ar skol-erc'h 4

E-PAD AN DEVEZHIADOÙ SKI
E VEZ MONTOURIEN GANEOMP...
BEZ' EMAN REUN...



Tennet eus « Kenô Bed Kriz »
www.b-heol.com

BANNOÙ-HEOL



RHAPS

RAP HA ROCK E BI

ATERSADENN GANT YOUENN, KANER

Pell zo out kroget da ganañ?

Un dra bennak nevez eo evidon. Kroget hon eus da bleustriñ e 2011 gant Rhapsoldya. Skrivañ testennoù e brezhoneg a oa ar pal kentañ ha war-lerc'h eo bet anat din klask kanañ anezho.

Peseurt mod ho poa kejet ar re gant ar re all ?
Dre ar strollad
Startijenn evit ar pezh

a sell eus Tangi ha Youenn. Klet a oa anavezet ganeomp dre e labour graet er strollad Gimol Dru Band. Anavezout a raemp Erwan Moal hag Erwan Volant dre forzh seniñ er festoù-noz.

Peur e oa krouet ar strollad ?
E 2011 hon eus kroget da bleustriñ. Sevel tri zon evit kemer perzh en Taol-lañs e Speied a oa hor pal kentañ.

Rhapsoldya en 1 ger:
"KOUNNAR"

Youenn

Petra a blij dit ar muiañ pa vezez war al leurenn ?
Lakaat e pleustr ar pezh a zo bet labouret e-pad pell en a-raok. Pa dremen mat an traoù e vez santet ur seurt youl a-stroll, etre ar strollad hag an arvesterien. Ur santadur dibar eo.

Petra a blij dit ar muiañ gant ar sonerezh ?
Ar Frankiz.

Peseurt dudi all a blij dit er vuhez ?
Bageal a blij din kalz.

Piv a skriv ar pozioù
Youenn
eo a




Ur gemenadenn evit

"Ne vern ar pezh tro dro deoc'h. hoc'h-unan."

OLDYA

YEZHONEG MAR-PLIJ !

Youenn (kan), Tangi (akordeoñs), Erwan (gitar), Klet (taboulinoù) hag Erwan (gitar boud) o deus krouet strollad Rhapsoldya. Ur meskaj rap ha rock a vez graet ganto, ha n'eo ket boutin e vefe eus un akordeoñs er c'hiz-se, nag e vefe skrivet ar pozioù e brezhoneg ! Sed'amañ rekipe Rhapsoldya, neuze stag da c'houriz ha bec'h de'i !



Setu golo o fladenn nevez-deuet er-maez

skriv ar pozioù. Skrivañ traoù nevez en hor yezh a glaskomp setu perak e vez skrivet pep tra gantañ.

Hag evit kompoziñ ?
Ar peurest eus ar strollad a gas soñjoù, forzh pegement. Pep hini a gas e levezonioù. Tangi en deus kaset ur bern riffoù savet gantañ da skouer (tammoù son c'hoariet ha c'hoariet c'hoazh).

Peseurt levezonoù a gaver ganeoc'h ?
Levezonoù a bep seurt a vez kavet. Punk, Funk, Rap ha Rock dreist-holl. Strolladoù evel Public Enemy, EPMD, Beastie Boys (Rap amerikan), Urban Dance Squad (Rock izelvroat), RATM (Rock-rap amerikan), Assassin (Rap gall), ARY, Glenmor, Storlok, Bernez Tangi (Sonerezh Breizh)...

Ha pedet oc'h bet e festivalioù dija ?
E Bro-c'hall pe e lec'h all ?
Kemeret hon eus perzh e festivalioù zo e Breizh hag e Bro-Euskadi dija. C'hoant hon eus digeriñ dorioù all bremañ evit rannañ al leurenn gant strolladoù rock. Klask lakaat un troad e lec'hioù ha n'int tizhet na gant strolladoù breton na gant ar yezh-se. Ar bladenn gentañ a zo bet embannet daou viz 'zo hepken, deomp bremañ da gendrec'hiñ an dud...



TANGI AKORDEOÑS DIADONEK

Pell zo out kroget gant an akordeoñs ?
Kroget on pa oan eizh vloaz ha daou vloaz-ha-tregont e vin ar bloaz-mañ.

Petra a blij dit ar muiañ pa vezez war al leurenn ?
An darempred gant an arvesterien.

Petra a blij dit ar muiañ gant ar sonerezh ?
Krouiñ tonioù nevez ingal. Peseurt dudi all a blij dit ez puhez ? C'hoari mell-droad.

Rhapsoldya en 1 ger:
"STOURM"

Ur gemenadenn evit al lernigoù ?
"Na sellit ket re ouzh ar skinwel !"
Tangi

al lernigoù ?
a soñj an dud
Soñjit drezoc'h
Youenn

war rhapsoldya.org
e c'hellez lenn ar
pozioù, selaou tonioù,
sellet ouzh fotoioù...

SOUEZHUSAT LOENED !

Ha goût a rez he dez pep buoc'h ur vignonez wellañ ?!



KRAK HA BERR

Traouigoù pe titouroù fentus !

Dit da ginnig ivez !
Kas ur postel da
camille.kvb@orange.fr

UN DEIZ

D'AN **23**
A VIZ MEURZH



Devezh etrebroadel an dour

Prizius eo an dour a evez bemdez. Muioc'h eget an hanter deus an dud war an Douar n'o dez ket dour a-galite da evañ.

KUZHET' VO AN HEOL GANT AL LOAR !

D'ar gwener 20 a viz meurzh




D'ar gwener 20 a viz Meurzh o tont e vo ur fallaenn heol leun, da lavaret eo e teuo al loar da guzhat skeud an heol, hag ar gouloù kaset gantañ enta. E Inizi Feroe e vo teñvalijenn penn-da-benn, e kreiz an deiz ! E Breizh e vo teñvaloc'h an oabl, tra ken. Gallout a ri sellet ouzh al loar o tremen dirak an heol, gant lunedoù avat : e tiez-apotiker e c'helli kaout reoù.



E SAOZNEG

« Let the cat out of the bag »



Leuskel ar c'hazh da vont maez deus ar sac'h.

Adlavar ur sekred !

YEZH AR SINOÙ

« Frouezh »


Treiñ a ra da arzorn, da viz-meud ha da viz-yod stag-ouzh-stag, hag ar bizied all a zo en o sav.



©Marianne Larvol

BEUARK !

Etre 12 ha 25 bramm a vez laosket ganit bemdez !



C'HAC'HAC'HA !

Petra eo an niver plijusañ da zivskouarn ar «Cow-Boyed»



103, (country)